

KANTIKOU PAROUZ GRONWEL

Gwerz an oitrou Sant Germen
Peden de Sant Germen
Kantik da Zantes Kristina
Kantik du Zant Conogan



MAVASKOU BREIZEK
SANTEBRIEG
Il-Moullerez an-Oitrou'n Eskob

1932

GWERZ

AN OTROU SANT GERMEN

Ton, Kelven.

DISKAN

*Sant Germen, enor Bro-Gall ha mignon Breiz-Izel,
Deuz ho kador en envou warn'omp teulet eur zel ;
Reit konfort d'ar labourer, pareet ar c'hlanvour,
Ha miret en ho c'havel hon bugaligoù baour !*

1. Bro-Gall zo bet a viskoaz bro ann dud a galon ;
Bet e enn amzer gristen skuer ar religion ;
Da zifen Iliz Jezus nikun na oa ken krenv,
N'eus ket unan a gasaz kement a zent d'ann env.
2. Er renk kentan deuz he zent, war-lerc'h ar verzerien,
E teu hon Patron gloriuz, ann Otrou Sant Germen
Ganet, pemzek kant vla zo, bars ar ghear a Auxer,
Deuz a gherent pinvik braz ha brudet 'n ho amzer.
3. Goude bout disket en Gall, da Rom ec'h eaz d'ar skol,
Hag hep dale he skiant hen zavaz dreist ann oll ;
Koms ken kaer hag he hini biskoaz na oa klevet ;
Bete gant ann Impaler Germen zo anavet.
4. Anavet e ha galvet evit gouarn he vro ;
Setu dindan he veli kear Auxer hag ann dro ;
Galloud, enor ha madou war he ben zo kevred,
Hag hen leun a iaouankiz, a nerz hag a c'hened.
5. Mes galloud, enor, madou, tentuz d'ar c'hrouadur,
A lak Germen da'n em doll war du ar blijadur :
Kredennou ar bayaned hag ho lidou mezuz
A gav frankoc'h d'he galon vit Aviel Jezus,

6. Kaer en doa Eskob Auxer kelen, pedi, gourdrouz,
Ar gouarnour aheurtet na re van euz ann drouz.
En ebad hag en dizeurs e teue he oll vuhe,
Ha skuier fall a re d'ar bobl ken a oa eun druhe !
7. Koulsgoude, euz lein ar gloar, Perc'hen ann ineou
Di-war ben ar prins iaouank na droe he zelou ;
Evel m'en devoa gwech-all chenchet kalon sant Paul,
Gant eur pec'her, eur vech c'hoaz, e rei eun abostol.
8. Sant Amator zo berzet abeurs ann Env, eun de,
E vije ar gouarnour eskob en he c'houde ;
Raktal e lak hen c'herc'had, hen digas d'ann iliz,
Hag e touz d'ezhan he ben herve ma oa ar ghiz.
9. Germen, daoust d'he oll eston, zentuz evel eun oan,
A zant eur galon neve en he greiz o tiouan ;
Resev a ra ann urzou digant sant Amator,
Hag, en eur vouez, ann oll bobl hen goulenn da bastor.
10. Mes brema piou a laro he vuhe vuzuduz,
He binijennou kaled, he oberou paduz ?
Mouez eun arc'hel marteze a helfe disrevel
Peghen tom oa 'n he ene karante 'n Aviel.
11. D'ar c'houls-ze war ann douar oa brezel ha gwalen ;
Ar bed pagan er maro a oa prest da zisken ;
Doue, vit hen kastia war-ben d'he dorfejou,
A c'halv deuz ann Hanter-Noz tud gouez a vandennou.
12. Guelet e vent o tired vel ar mor en kounar ;
Na lezont a-dren ho c'hein nemeid tan ha glac'har...
Brevet dre-oll ar mezou, ar c'heariou diskaret...
Ema gant-he ann Europ laket vel eur verred !..
13. Ia, meid hon Mam an Iliz zo digor he divrec'h ;
Lec'h n'hell netra ann armou he c'halon a vo trec'h ;
Gant hec'h eskibien zantel ha gant he beleien,
Deuz a dud krid ha diboele hi a rei kristenien.
14. Er skol gant Eskob Auxer a zo zent o tiski ;
Patris, Briek hag Iltud zo en ho zouez ho zri.
Deuz eno, ar gloer iaouank, dre ma erru ho zro,
A zoug sklerijen ar Fe eun tammik da bep bro.
15. Vel ma sav ar bleun er eod, pa ve dru ar c'hlizenn.
Velse e luf hep dale ar vertuiou kristen ;

- Koms burzudus Sant Germen hag he skolerien vad
A lak tan ar garante a bep tu da grenvad.
16. Beteg en Breiz-Veur, diou vech, Germen a dremenaz ;
Enep d'ann heretiked eno e prezegaz ;
Enep tud ann Hanter-Noz difen a reaz Breiziz,
Hag, hep skuill goad, e kasaz ar Zaozon war ho c'hiz.
 17. Diou vech ive deuz gwal-heur e viraz Breiz Izel,
Evit Breiz-Izel memez e tigouez mervel,
Rag ma oa eet da Ravenn, hag hen en he gozni,
A oa da c'houlenn truhe evit hon Tadou-ni.
 18. Daoust da c'hlac'har Ravenniz, pa varvaz sant Germen
E oa rentet e Auxer, vel ma oa he c'houlenn ;
En chapelik Sant Vauris, hag en devoa zavet,
Tro pevar-c'hant hanter kant, e oa zebeliet.
 19. En he vuhe, e lake he vaz da hadc'hlazan,
Ar re glanv baour da iac'had, ar re varv da vevan ;
Mes he c'halloud en envou aboue zo brasoc'h c'hoaz,
Hag e lagad zo digor war he vro vel biskoaz.
 20. O Sant Germen, hon zad ker, Briez Izel ha Bro-Gall
A zo hirie en danger evel ma oant gwech-all ;
E toul hon dor, siouaz d'imp ! ema ann enebour ;
Piou, gwelloc'h evid hoc'hui a helfe hon zikour ?
 21. N'hon touez-ni da vihana, miret ar fe gristen,
Greit ma vevo 'n hon c'halon Jezuz hag he lezen,
Reit honestiz d'ar gherent, respet d'ar vugale,
Furnez d'ar re zo en karg, d'ann oll doujans Doue !
 22. Hon planeden, er bed-ma, peurvuia zo kaled :
Da stourm hon euz deuz ar bed ha deuz ann droug-
[spered,
Da stourm deuz ar baourente ha deuz ar c'hlenvejou :
Oh ! bezet hon difenner, difenner hon zadou !
 23. Hag, eun de, er baradoz, en-dro d'ac'h a vanden,
Assamblez gant hon zud koz ni gano da viken ;
Meulodi d'hon Fatron mad en deuz hon zikouret :
Meulodi ha trugare, sant Germen binnighet.

Peden de Sant Germen

EVIT AR VUGALIGOU

TON : *Ni ho salud, Rouanez.*

1. O Sant Germen, ken mad da Vreiz-Izel,
Hon re vihan, miret he 'n ho c'havel !
Ho diwalet deuz reuz ha deuz klenved,
Difennett he euep ann droug-spered !
2. En draonien-man a boan hag a anken,
Ar vugale 'n euz ho bec'h da zoughen ;
Ar re vihan a renk vel ar re vraz
Kemer ho lod en daelou hag er groaz.
3. Ama ho mouez zav hirie truezuz
Beteg ho trôn, Patron karantezuz :
Ho daou dornik treseg hoc'h astennet,
E kront oll : Tad mad, hon zikouret !
4. Mar d'e dister peden ar c'hrouadur,
Da vihana he galon a zo pur :
O sant Germen, deuz a lein ann envou
Greit eur zel dous war hon bugaligou !
5. Ni, ho mammou, ni anav ho kalloud,
War hon daoulin, ni gas d'ac'h hon c'hirvoud.
Ia, hon c'hirvoud, rag eur vam, er bed-ma.
A zo bepred he c'halon o krena.
6. Harpet gan-ac'h ni a vevo dinec'h,
Dre ho sikour d'ann oll ni a vo trec'h,
Trec'h d'ar c'hlénved, d'ar bed ha d'an diaoulou ;
Bet hui hon skuer, hon nerz hag hon goulou !
7. Hag en divez, mammou ha bugale
Pignet d'ho zro en palez enn ale,
Dirag Doue a rei ho meulodi
Hag a reno en-tal d'ac'h en dudi.

Evelse bezet gret !

Y. O.

Kantik da Zantes Kristina

TON : *Ker Is.*

DISKAN

*Doue, mad hag oll-c'hallouduz
Astenet d'imp ho torn nerzuz.
Vel Kristina ni zo en bec'h ;
Evel d'ezhi reit d'imp an trec'h.*

1. Zantes Kristina oa ganet
Euz a dud pinvik ha brudet ;
Gened he doa, enor, spered,
Kement a lufr dirag ar bed.
2. Kaeroc'h donezon koulskoude
E doa-hi bet digant Doue :
En he spered oa eur fe grenv,
Da ziskoue d'hei guir hent an nenv.
3. En he c'halon e verve c'hoaz
Karante Jezuz hag he groaz,
Beteg ar maro oe fidel
Da Jezuz, he fried santel.
4. He zad, he mamm oa paianed,
Digalou evel al loned,
Ha konared evel bleizi,
E klaskont an tu d'he zrec'hi.
5. Evit plego he verc'h tener
He zad n'espern tan na bijer,
Na krigi houarn d'hi dispenn ;
Med Doue oa ouz hi difenn.
6. Maro hi zad, daou varner all,
Evelthan dinatur ha fall,
Dre dan, dre zour, dre loned gwe
A glaskaz lemmel he bue.
7. Na fe, na bue na gollaz,
Med hi feden Doue' glevaz,

« Ra blijo gant ho polante
« Ma digemer er gwir vue ».

8. Eur vouez neuze en lein an nenv :
« Christina, bet oc'h mad ha krenv ;
« Deut da gemer ho lod er c'hloar,
« Gonet ganac'h war an douar ».
9. Gras d'imp da chom stard en hon Fe
Ha stard en karante Doue.
Nac'h ar gwir fe, hon Fe zantel !
« Kentoc'h mervel, kentoc'h mervel ! »

Amen...

Kantik du Zant Conogan

TON : *Bosen Elliant.*

DISKAN

*Zant Conogan, Mignon Doue,
Gret ma karimp traou an ine ;
Gret ma kerzimp en ho roudou,
Evid mont ganac'h d'an Envou.*

1. Ganet eveldomp-ni en Breiz,
C'houi poa madou, madou eleiz ;
Med, petra dal traou an douar,
Etal gras Doue hag he c'hloar.
2. C'houi hentaz ar skolajou braz
Hag e poa diskaturez vraz ;
Med, oll skianchou ar bed ma,
Etal ar vurnez, n'int netra.
3. C'houi droas kein d'an enoriou,
D'ar blijadur ha d'ar madou,
Evid gonid ar Baradoz
Gant bue zantel da c'hortoz.
4. Galvet da vout eskop Kerne
C'houi eaz eneb d'ho polante
Evid bout sentuz ouz mouejou.
Mouejou Doue hag ho Mestrou.
5. Eur vech en karg, eur vech zakret,
C'houi grogas lemm, korf ha spered,
C'houi beurdalc'has bete' mervel
D'ober mad ho labour zantel.
6. Skoet d'ar maro gant terzien,
D'ar bedén ha d'ar binijen
C'houi chomaz bepred aketuz,
Vel war ar Groaz ho Mest Jezuz.
7. Pellet ouzimp ar grenijen,
Majet er c'horf gant an derzien,

Ma vimp, evel pesked en dour,
Zeder, iac'h d'ober hon labour.

8. Maget dreist oll en hon c'halon
Gwen vad ar fe gant gruiou don,
Temzed-hi dru gant dour ar c'hras,
Ma teulo frouez, ha mad, ha bras.

9. Ha ma choms krenv hon ine,
Ken nerzus evel m'eo ar gwe,
Ken nerzus hag ar gwe huel,
A ra eur c'houriz d'ho chapel.

Amen...



IMPRIMATUR :

Brioci, die 9^a martii 1932.

Eug. BELLEC,
Vic. gen.